

Pedenn ar Breizad Prizoniet

Ton : ALLAZ ! ne c'houfe den kompren.

DISKAN :

*Kemerit, Jezuz, ni ho ped,
Ar boan a sko warnomp bepred,
Da c'hounit peoch, frankiz d'ar bed.*

Dirazoc'h, Jezuz benniget,
Ni a zo aman daoulinet,
Hor c'halon brevet gant glac'har,
Evel doc'h-c'houi war eur c'halvar.

Truez ouzomp, o Doue mat,
Rak ni ' zo truezus hor stad;
Er prizon, pell diouz hon tud ker,
Bras eo hor c'hoant da vont d'ar gêr.

Hor sonjou d'eomp, en noz, en deiz,
A nij betek hon tudou keiz;
Peur e c'hellimp-ni, adarre,
Gwelout pried ha bugale?

Kennerzit d'eomp hor c'halonou,
Ma c'hellimp gouzanv hor poaniou,
Gant karantez a gant feiz krenv,
Da c'hounit kurunenn an Nenv.

Gwerc'hez, o Mamm garantezus,
Ouzimp, bezit madelezus;
Da bep hini, roit frankiz;
D'ar wazek ha d'ar Yaouankiz.

Torrit buan hon hualou,
Ma welimp c'hoaz hon douarou,
Ma c'hellimp holl, heulia gant feiz,
Giziou koz ha kristen hor Breiz.

Ha c'houi, sent koz a Vreiz-Izel,
Klevit pedenn ho tud fidel;
Adsavit Breiz eur wechig c'hoaz,
Ma vezo ken kaer ha biskoaz.

LAOUENANIG BREIZ.

